



**ORVEZ**

Tost echu eo al labourioù er skol Diwan nevez el Liger-Atlantel. Digoret e vo e miz Genver 2026.

PAJENN 2



**KLEWELED**

Ur pennad-kaoz gant Justine Morvan, sevenourez an teulfilm "Karantez vamm".

PAJENN 5

# DIAMANTOÙ DU BREIZH



11 000 tonenn a ed-du a vez bevezet e Breizh bep bloaz. E Sant-Kouloum, en Il-ha-Gwilen, e vez dalc'het ur fest e miz Gwengolo evit lidañ ar plant-se. PAJENN 3

AR SIZHUNIEG EMBANNET GANT KEIT VIMP BEV ABAOE 2005

**deus'ta!**  
QUEL SEVENADUR BREIZH 2025  
FÊTE DE LA CULTURE BRETONNE

5,6,7,8  
A VIZ DU  
NOVEMBRE  
BREST

5/11 LA CARÈNE ASTRAN PROJECT  
6/11 FAUBAIN PLOUË&FOEN, TANORC  
7/11 MME DESLAN FISKAL-CIE C'HOARI  
8/11 LES REVUEURS DES CAPUCINS  
LANDAT/MOISSON, TITOM,  
TRIBE/BRASS BAND,  
DIGABESTR, QUÈRE/LE PAPE, TRISKILL,  
SKRAB, FANFAR HEJ DA RU, AIGRE-DOUX TRIO,  
KEURENN BREST SAINT MARK, BAGAD ADARRE  
FESTIG & ANIMATIONS



an tostañ ar gwellañ da bep hini

Crédit Mutuel Arkéa - S.A. coopérative de crédit à capital variable et de courtage d'assurances. 1, rue Louis Lichou, 29480 Le Relecq-Kerhuon. Siren 775 577 018 - RCS BREST - Orias 07 025 585. 3/2024.

## SKOL DIWAN ORVEZ E BRO NAONED : MONT A RA AL LABOURIOÙ WAR-RAOK

Etre an 2 hag ar 5 a viz Here e oa aet kalzik war-raok chanter bras evit nevesaat ha sevel skol Diwan Orvez. Digeriñ a raio ar skol d'ar 5 a viz Genver 2026. Labourioù a chom d'ober c'hoazh memes tra.

Sinet oa bet ur feurm amfiteotek d'ar 27 a viz Meurzh tremenet etre Skol Diwan Orvez ha ti-kêr Orvez [s.o. niv. 1036 Ya!]. Kazi perc'henn emañ Diwan neuze war ar savadur e-pad 35 bloaz gant ur feurm bloaziek izel-tre : 100 €. Ar chanter nevesaat zo douget hag arc'hantaouet gant ar c'huzul skoazell lec'hel hervez reolenn ar feurmou amfiteotek. Gant Roc'h Diwan ez eus bet arc'hantaouet 20 000 € eus ar raktres-mañ. Roc'h Diwan eo ar font debarzhadur stag ouzh Diwan. Un aozadur a resev madoù, tiez, pe asurañs buhez an dud a fell dezho



Lou Millour, kenrenerez Diwan, ha Melaine Looten, eus Kuzul Skoazell Diwan Orvez.

sikour savadurioù Diwan eo. "Ur sammad a-bouez ruz eo. Sikour a ra klokaet ha suraat teñzorerezh ar chanter, kaout amprestoù bank, diskouez d'ar strollegezhioù publik eo solut ar raktres..." hervez Brendan Guillouzic-Gouret, prezidant Kuzul Skoazell ar Skol.

### Ur chanter gant perzhidi eus rouedad Diwan

Meur a chanter zo bet kaset da benn gant tud eus rouedad Diwan ha mignoned ar skolioù brezhonek. Savet ez eus bet ur pezh mell pratell e koad Douglas gant tadoù eus skolioù Bro-Dreger. Ar c'hoad a galite a oa bet troc'het e ZAD Kernitron-al-Lann ha degaset gant ur skoliad bet e Diwan ivez. Nevez zo, d'ar 4 ha d'ar 5 a viz Here, e oa ur skipailh liorzhourien, bet savet gant bodad savadurioù Diwan, o labourat er skol. "Ar bodad pouezus-se zo e bal dezhañ sikour hag heñchañ ar skolioù, ar skolajoù hag al liseoù en o raktresoù savadur bras", a lavar Lou Millour, kenrenerez Diwan e karg eus ar savadurioù. Deuet eo Maodez Huon, liorzhour a-vicher eus Speied, gant e gamion, hag heñchet en deus an holl dud a-youl-vat. Ar skipailh a oa klokaet gant ur strollad tud bet e Diwan en o bugaleaj, c'hoant ganto sikour ar raktres. Gant ar stal Dour-Douar eus Koloreg, renet gant Armel Barazer, bet skoliad e Diwan ivez, eo bet graet ar studiadennoù



Al liorzhour Maodez Huon gant ar bal-vekanik, Divi Kerneis deuet a-youl-vat, ha Vincent Meril eus kuzul skoazell Diwan Orvez er foñs.

dour evit reiñ ur framm d'ar chanter puraat an dour-glav. "Ar bodad savadurioù en deus bet ur garg merour evit sikour prenañ an dafar mat, aozañ mat ar raktres en a-raok evit labourat 2 zevezh war al lec'h en ur mod efedus-kenañ", eme Dristan an Nedeleg eus Kuzul-merañ Diwan.

### Ur porzh-skol nevez-flamm

A-drugarez d'an dibenn-sizhun labour start eo deuet brav an disoc'h : staliet ez eus bet ur gloued tro-war-dro ar porzh-skol, savet ur puñs dour-glav,

graet mañsonerezh bihan, kempennet ar porzh-skol penn-da-benn (un dachenn 350 m<sup>2</sup>) hag hadet al leton. "Ur chanter da ouzhpenn 10 000 €, ma n'eo ket muioc'h, zo bet kaset da benn gant nerzh an dud a-youl-vat", eme Lou Millour "Ur sin a genskoazell greñv etre tud Diwan".

### O klask tud evit echuiñ ar chanter

Emañ skipailh Diwan Orvez o klask tud o defe barregezhioù ispisial evit sikour war postoù resis-tre : "Emaomp o klask un den gouest da boziñ ul leur bavez er porzh-skol,

tud barrek da zifuiñ, d'ober plako ha bandennoù, tud ampart war ar munuzerezh evit staliañ ur gegin ha sikour biñsañ ur plañchod erc'hignol, peotramant ur plomer evit lugañ tout ar gegin hag ar privezioù nevez".

### Kuzul skoazell Skol Diwan Orvez

Gouzout hiroc'h diwar-benn chanterioù Skol Diwan Orvez : skoazell.diwan.orvez@gmail.com / 07.83.85.98.33 / 5, straed Landreau 44700 Orvez

Evit reiñ madoù da Roc'h Diwan : demat@diwan.bzh

## MUIOC'H A ENBROIDI O LABOURAT E BREIZH

Abaoe 10 vloaz eo kresket an niver a enbroidi a zo o labourat e Breizh. Setu ar pezh a ziskouez ur studiaden gant an INSEE. En uzinoù an agrobouederezh, el letierezh pretierezh, hag er sevel tiez e vezont enfredet ar muiañ.

68 500 labourer estren zo o labourat e Breizh e 2025, da lavarout eo 5 % eus ar postoù labour. E 2012 ne oant nemet 3 %. "En agrobouederezh e vez enbroidi o labourat evel micherourien, ar pezh a c'haller ober hep diplom", a zispleg an INSEE. N'eus netra souezhus. A-feur ma kresk live studi Breizhiz e teu da vezañ diaesoc'h kavout micherourien kontant da labourat en uzinoù, seul vui



An estrañjourien a ya d'ober etre 8 % ha 10 % eus al labourerien en agrobouederezh, el letierezh pretierezh, er sevel tiez hag en interim. © Freepik

m'eo izel ar feur dilabour er mare-mañ.

### 36% anezho e Roazhon

N'eus ket micherourien estren e pep lec'h e Breizh. Emañ an hanter anezho e

pevar zakad implij : Roazhon, Karaez, Lambal ha Pondi. E-touez ar re a zo o labourat e Roazhon o deus an hanter anezho un diplom studioù uhelañ ha dont a reont eus Afrika dreist-holl. E Karaez, Lambal ha Pondi e teu al lodenn vrasañ anezho eus

Europa ha labourat a reont el labour-douar hag en uzinoù agrobouederezh, el lazhtioù pe war bostoù labour rannvloaziat pe micherioù hag a c'houlenn nebeut a stummadur.

### Un diouer a vicherourien

Ar Vretoned n'o deus ket c'hoant da vont war vicherioù zo ha setu perak e vez implijet estrañjourien. Mont a ra ar re-se d'ober etre 8 % ha 10 % eus al labourerien en agrobouederezh, el letierezh pretierezh, er sevel tiez hag en interim. Ar 15 micher a vez enfredet ar muiañ a estrañjourien warno zo labourioù ha n'eus ket ezhomm da vezañ stummet pell evit mont warno, en agrobouederezh met ivez

er servijoù naetaat hag er sevel tiez. A-wechoù e vank tud stummet e metoù zo, evel adklañvdiouezed ha stlennegourien.

Startoc'h e vez d'an estrañjourien kavout labour. 67 % eus ar re o deus etre 25 bloaz ha 54 bloaz zo o labourat, tra m'eo 86 % evit an dud a orin breizhat. Gwashoc'h eo evit ar merc'hed, dreist-holl gant bugale. "Ne vez ket komzet galleg mat a-walc'h atav, un diplom tapet en estrenvro n'eo ket anavezet dre ret emañ, n'hallont ket en em harpañ war ur rouedad familh emañ, bezañ un estrañjour zo ur skoilh ivez. Setu meur a abeg d'an diaesterioù o devez da gavout labour", eme an INSEE.

Y.Y. ar Gov

## BERR-HA-BERR gant TRISTAN

### Taol penn-bazh war aozadur ar Stad e Frañs

Met petra a c'hoarvez e Pariz ? M'hon dije kredet ober goap diwar mont en-dro diboell ar Stad jakobin e Frañs n'hon dije ket ijinet gwelloc'h ! Gouarnamant Lecornu zo chomet en e sav un deiz hepken, roet e zilez kerkent gant ar c'hentañ ministr. Ur bramm er c'hleuz ur wech c'hoazh neuze... Kement-se a ziskouez da vihanañ n'int ket gouest e Pariz da gavout trawalc'h a dud nevez evit merañ an aferioù, ha setu galvet en-dro ganto ar ministr kozh Bruno le Maire, pe ministr "toull e chakod"...

### Sifr ar sizhun : 71 %

Setu an dregantad a dud e Frañs a vefe a-du gant ur Stad kevredadel (d.l.e. federal) hervez an IFOP. Diskouez a ra ar studiadenn-se ur c'hoant kreñv-tre gant an dud da cheñch penn d'ar vazh ha da cheñch mont en-dro ar Stad evit reiñ, a-benn ar fin, kalz muioc'h a c'halloudoù d'ar strollegezhioù lec'hel. Hervez an IFOP e vefe douget ar c'hoant-se gant an dud e kement rummad oad a zo, hag eus kement tu politikel a zo : un dispac'h bras eo !

### Taol-from

Da labour enklask kazetennerien *Splann!*. Gourdrouz a vez graet dezho gant 3 ospital eus Breizh abalamour m'o deus "kredet" ar gazetennierien goulenn titouroù evit sevel o enklask. Furchal, enklask, diskoulmañ, studiañ, dizoleiñ ar wirionez... daoust ha n'eo ket se labour ar gazetennierien just a-walc'h ? Emichañs e raio tro-wenn an dagadenn graet a-enep dezho el lez-varn. Gellet a ra neb a gar reiñ un tamm gwenneg bep miz da *Splann!*, dezho da genderc'hel gant o labour enklask : <https://splann.org/br/archantaouin/>

## TUTA N'EO KET A-WALC'H, RET EO LOJAÑ

Gouzout a ra mat-tre Kambr Kenwerzh Breizh ez eus kudennoù abalamour d'an diouer a lojeizoù. Pa zeuer eus pell evit labourat e ranker kavout ul lojeiz. Ne vez ket aes avat. Studiet eo bet ar sujed-se gant ar Gambr Genwerzh.

20 000 annezad nevez a vez degemeret e rannvro Breizh bep bloaz. Ur rannvro gant ur feur izel a dud o klask labour eo Breizh. 6,1 % eo ar feur dilabour enni, unan eus ar re izelañ e Frañs. Abaoe bloaz e tigresk an niver a diez ha ranndioù nevez bet savet. "En ur lakaat stad an traoù war-wel e faot deomp sachañ evezh an dilennidi hag hini pennoù bed ar sevel tiez diwar-benn ar riskl a zo evit an embregerezhioù da vezañ skoillet o diorren. Hep lojeizoù ne c'heller ket tuta", eme Jean-Pierre Rivery, prezidant Kambr Kenwerzh Breizh.

Goulennataet eo bet an embregerezhioù. 60 % anezho a gav dezho ez eo diaes tuta abalamour d'an diouer a lojeizoù. 30 % a embann zoken ez eo ur skoilh bras evito. Ne vo souezhet den ma vez lavaret ez eo bed al letierezh-pretierezh ar rann eus an ekonomiezh a vez lakaet an diaesañ, dre



An embregerezh FenêtraA a laka sevel tiez evit e c'hopriddi, war un dachenn en ur c'harter-anezañ e Benion (Mor-Bihan). © NG

ma vez implijet labourerien rannvloaziat, hag a vez o labourat e-pad an hañv hepken peurvuiañ.

### Kinnig lojeizoù d'al labourerien

Prederiet eo an embregerezhioù. Setu perak ez eus bet klasket reiñ sikour d'an implijidi nevez-c'hopraet gant ur c'hard eus an embregerezhioù a zo bet aterset. Alies e roont ur ur skoazell arc'hant evit kavout

ul lojeiz met gwechoù zo e kinnigont ul lojeiz e-pad ur prantad berr, dreist-holl el letierezh-pretierezh. Pe neuze e soñjont en doare ma teuo ar c'hopriddi d'o labour.

Ur skouer heverk eo hini FenêtraA, ur stal eus ar Mor-Bihan. Divizet he deus lakaat sevel tiez evit he gopriddi. Ar re-se a c'hello feurmiñ pe prenañ o lojeiz. Ur raktres 42 annez eo.

A-wechoù e vez graet taolioù-esae gant an

embregerezhioù hep na badfent avat, rak ne vez ket mat an diskoulm atav. Kreskiñ ar goproù a c'hell bezañ graet ivez. Setu ar pezh o deus graet 25 % eus an embregerezhioù a zo bet goulennataet.

234 embregerezh (enno-holl muioc'h eget 5 goprad) o devoa respontet d'an enklask sevenet gant ar Gambr Genwerzh.

Y. Y. ar Gov

## UR FEST EVIT ENORIÑ AN ED-DU

**Evit ar pedervet gwech e oa bet dalc'het Fest an Ed-du, evit enoriñ ur blantenn bet implijet kalz e Breizh gwechall. D'an 13 a viz Gwengolo e oa deuet tud da Sant-Kouloum, tost da Sant-Maloù, da welout penaos e vez keginet gant ed-du.**

N'eus ket bet ed-du atav e Breizh nag e Frañs kennebeut. A orin eus Azia e oa ar blantenn. Erruet e vefe en Europa er XIV<sup>vet</sup> kantved. Daoust ma vez anvet ed-du e brezhoneg ne vefe ket ur spesad ed anezhi koulskoude. Ur blantenn gounezet evit he greun eo, tost d'an ed evel ar c'hinoas. E 1497 e voe meneget an ed-du e Roazhon evit ar wech kentañ. Gouzout a reer e veze gounezet e 1502 e Sant-Brizh-Gougleiz, ur vourc'h vihan etre Felger hag Entraven. E Breizh an hini eo e produer hag e tebrer ed-du dreist-holl, abalamour d'ar c'hrapouezh. Debrñ a reomp war-dro 11 000 tonenn

bep bloaz, un drederenn eus ar pezh a vez implijet e Frañs, 3,5 gwech muioc'h dre zen eget e lec'h all. 70 % eus an ed-du a vez debret e Frañs a zeu eus an estrenvro. Ha war-dro 70 % eus an ed-du a vez produet e Frañs a vez gounezet e Breizh. Pell zo dija, e 1987, e oa bet savet ar gevredigezh *Blé Noir Tradition Bretagne*. Deuet e oa a-benn da dapout un anvadur "lec'h orin gwarezet" (LOG : IGP e galleg) e 2010. Boued ar paour e oa an ed-du gwechall-gozh met meulet e vezont bremañ evit o ferzhioù mat magus ha mat evit ar yec'hed. Aesoc'h int da ziazezañ (hep gluten int) ha proteinoù plant zo enno.

### Doareoù nevez da aozañ an ed-du

Deuet e oa ar mestr-keginer Nicolas Bozeg d'ar fest e Sant-Kouloum. Diskouezet en deus ar pezh a c'heller ober gant ed-du. "Fardet em eus krogennigoù ed-du, aozet e stumm rizoto, gant fourmaj-laezh Comté"



E nebeutoc'h eget 10 000 hektar e vez gounezet ed-du e Breizh evit poent. Tost da 70% eus an ed-du bevezet e Breizh a zeu eus Sina. © Wikimedia Commons

emezañ. Aozet e oa bet a-ratozh-kaer gantañ evit ar gouel.

Ur genstrivadeg zo bet ivez, da c'houzout gant piv e vefe graet ar grampouezhenn wellañ. 8 krampouezher a-vicher o deus kemeret perzh, ha kement all a amatourien o deus kenstrivet a-gostez. En o mesk edo

Elodie Cottreau. Derc'hel a ra an ti-krampouezh *French e ... San Francisco*.

Un 3000 bennak a dud zo deuet d'ar fest. "Emañ an eürusted er parkad ed-du", eme Vertrand Larcher, perc'henn an atant *Breizh Café*, aozer ar gouel.

Y.Y. ar Gov

## DISPAC'H, UR STROLLAD DIZALC'HOURE

**D'ar 27 a viz Gwengolo e oa bet aozet un devezh ispisial gant ar strollad politikel Dispac'h : ur vanifestadeg e Naoned ha prezegennoù ha sonadegoù er ZAD – Zone à défendre – e Kernitron-al-Lann. Ur pennad-kaoz gant un den eus ar strollad.**

**Gallout a raves displegañ deomp petra eo Dispac'h ?**

Ur strollad dizalc'hour eo, bet savet e 2018. Deuet eo da vezañ anavezet dre gudenn al lojeiz da gentañ. Abaoe 2018 en deus kemeret perzh e meur a stourm. (hini ZAD Kernitron-al-Lann ha reoù all). Da gomañs e oamp ur strollad mod "agit-prop", d'ober propaganda war temoù sokial a selle eus ar vro. Hirio omp deuet da vezañ ur strollad politikel-sevenadurel. Evit ar pezh a sell eus abaden ar strollad : da gentañ hon eus savet ur bern traoù a-raok distanañ un tamm. Adalek 2022 hon eus staget en-dro ganti : aozet ez eus bet prezegennoù (temoù a bep seurt : an adlodennañ, Kurdistan, Euskadi...) ha festoù-noz. E miz Gouere 2025 e oa bet aozet ur mell fest : an Emgavioù Etregalaktek e ZAD Kernitron-al-Lann. "Paouez gant an impalaerezhioù" e oa an tem. Pedet ez eus bet tud da lakaat ar gaoz war stourmoù ar minorelezhioù er bed. E Breizh da gentañ, met ivez e Kurdistan, Euskadi, Kanaky, an Ouïghouriz hag ar Veajourien ivez.



**Pelec'h en em gavet e-touesk ar re a labour war dachenn ar rannvroelouriezh ?**

Ur strollad dizalc'hour eo ha n'eo ket rannvroelour an hini eo. Disheñvel eo peogwir n'eo ket ar memes soñj diwar-benn an darempred gant ar Stad. A-enep gwask ar Stad C'hall emañ Dispac'h, fellout a ra d'ar strollad stourm a-enep dezhi ha n'eo ket en em gavout gant ur Stad kevreadel ma vefe Breizh dindan gwask ar Stad c'hoazh (ur bazenn ret a-raok kaout an disparti da

vat). Tost eo hor mennozhioù da re ar CBIL (*Coordination Bretonne Indépendante et Libertaire*) er bloavezhioù 2000. Chom a reomp dizalc'h diouzh pep strollad politikel. Pouezus eo chom hep kaout re a liammoù gant strolladoù ofisiel, peogwir eo pouezus-bras tem emgann ar renkadoù : alies e vez techet ar strolladoù politikel da zisoñjal an dra-se. Dre-vas, ne fell ket d'ar strollad chom gant ur soñj "stourm dizalc'hour a-raok pep tra" peogwir eo ret derc'hel kont eus pep gwask ha droukziforc'h.

**Merzhet em eus un diferañs bras gant strolladigoù all. Derc'hel a rit kont eus ar gallaoueg ivez ?**

Anat eo deomp e ranker derc'hel kont eus ar gallaoueg. Eus Breizh-Uhel e teu lod eus an izili, eus familhoù ma vez komzet gallaoueg pe tammoù gallaoueg enno. Ouzhpenn-se eo diboell klask lakaat an dud eus Breizh-Uhel da grediñ e veze komzet brezhoneg en o zerouer (pa vez krouet anvioù-lec'h diwar netra evit erlec'hiañ anvioù gallaoueg anavezet gant an holl). Dreist-holl e-lec'h ma chom bev-mat ar yezh c'hoazh. Ur yezh poblek eo ar gallaoueg e Breizh-Uhel e-giz e Breizh-Izel. Dav eo gwareziñ anezhi. Padal ar brezhoneg zo un arouez talvoudus e Breizh-Uhel ivez. Talvoudus ivez war dachenn ar stourm. Ur seurt "soft power" en deus bet ar brezhoneg ha roet en deus nerzh da sevenadur ha stourmoù Breizh-Uhel. Hep an nerzh-se en defe soubet ar gallaoueg er galleg abaoe pell. Komzet e vez brezhoneg ivez gant gallaouegerien ar strollad. Un arouez bras eo. Doubl eo identelezh ar vro. N'eo ket nevez an dra-se : embannet e oa bet gant ar CBIL er bloavezhioù 2000.

**Peseurt liammoù ho peus gant strolladigoù politikel a-ziavaez-bro ?**

Ur strollad etrebroadelour eo Dispac'h. Liammoù zo gant un nebeud strolladoù hag a stourm e broioù all (evel Iwerzhon pe Kurdistan), ha dreist-holl gant ar pobloù a zo dindan gwask Stad Bro-C'hall, peogwir e stourmomp a-enep ar memes enebour. Ar memes raktres politikel diazezet war an dizalc'hiezh hon eus.

**Da betra e servij mont da**



**vanifestiñ ur wech ouzhpenn evit unaniñ Breizh ?**

Evidomp-ni eo bet cheñchet an degouezh gant an troc'hoù budjed. E-pad votadeg ar c'huzul-kêr en Naoned e miz Genver e oa bet lavaret eun, ma vije bet departamant al Liger-Atlantel e Rannvro Breizh, ne vije ket bet ret dezhañ heuliañ troc'hoù budjed kinniget gant *Pays de la Loire* – renet gant Christelle Morançais, tost he soñjoù da reoù Bruno Retailleau – zo deuet da vezañ ur seurt labo evit ar politikerezhioù enep-sokial hag enep-sevenadur. Da skouer ez eus bet dilamet tost da 100 milion a euroioù war dachenn ar c'hevredigezhioù er bloaz paseet. Ur skouer all : skoazellet he deus ar Rannvro-se an darvoud "La nuit du bien commun" savet gant Pierre-Édouard Stérin, penn-bras eus en tu-dehoù pellañ. Perak e vez degemeret ha soutenet darvoudoù evel-se gant an arc'hant publik diouzh un tu ha dilezet budjed ar politikerezhioù sokial diouzh an tu all ?

Evidomp, n'eo ket posupl difenn an demokratelezh hag ar sevenadur hep stourm evit ma teufe al Liger-Atlantel er-maez eus *Pays de la Loire*, peogwir eo deuet da vezañ un ensavadur a vez douget gant soñjoù mirour-bras. Ouzhpenn-se e servij ar vanifestadeg-se da sevel liammoù gant tud eus Iwerzhon. P'hon eus embannet hor programm ez eus bet kaset deomp ur gemennadenn gant tud eus Iwerzhon hag a oa dedennet gant an danvez. Fellout a rae dezho dont da vanifestiñ ganeomp, ar pezh en deus roet tro deomp goude-se

da bediñ anezho evit ar brezegenn gant Christian Tein hag ar sonadeg. Skoazellañ a ra Dispac'h stourm Kanaky. Fellout a ra deomp reiñ nerzh da stourm Kanaky, ha reiñ a ra stourm Kanaky nerzh deomp ivez.

**Da echuiñ, peseurt simbol eo Kernitron-al-Lann evidoc'h ?**

Stourm Kernitron-al-Lann eo hor Plogoñv. Puih eo istor ar ZAD : lod ac'hanomp zo bet desavet gant istorioù stourmoù ar bloavezhioù 1970, treuzkaset gant hon tud. Met pa oamp erru en oad da gregiñ gant ar stourm omp en em gavet gant un emsav a yae war goshaat, hag a vage soñjoù eus un amzer tremenet. Neuze e oa anat deomp kemer perzh e stourm Kernitron-al-Lann. Stummet en deus ar stourm-se ar re goshañ diwimp. Sur a-walc'h ne vefe eus Dispac'h hep ar ZAD. Ur skouer vray eo ar ZAD-se rak gounezet hon eus n'eo ket kement-se abalamour da enebiezh an dud ouzh raktres an aerborzh, met abalamour m'omp deuet a-benn da ginnig ur patrom kevredigezh all hag en deus roet spi da vilionoù a dud. Moarvat ne vijemp ket deuet a-benn da virout a sevel an aerborzh hep se. Ur seurt Breizh dieub eo bet ar ZAD evidomp-ni, stourmerien evit an dizalc'hiezh, etre 2012 ha 2018, pa oa penn-da-benn e-maez kontroll ar Stad C'hall. En istor modern Europa, n'eus skouer ebet all eus un takad ken bras se en defe achapet diouzh kontroll ur Stad vodern e-pad kement a amzer.

Kroget e oa ar re goshañ ac'hanomp da zont d'ar ZAD e 2012 evit enebiñ ouzh ar skarzhañ, ha distroet goude

da bep emgav bras. Ar pezh hon eus desket gant stourm ar ZAD eo ar soñj e ranker stourm gant doareoù disheñvel : ret eo stourm asambles, gant an dud hag a gred stourm ouzh ar polis pe stourm dre oberoù sabotañ, evit lakaat ar galloud da gilañ. An dra-se en deus roet tu da radikalizañ ha da reiñ spi d'ur rummad a stourmerien. Ne vije ket ur spered a stourm ken kreñv e Naoned hag e Roazhon hep an hêrezh-se. Ouzhpenn skoazellañ ar stourm a-enep an aerborzh hon eus labouret kalz ivez abaoe 2016 en ul lec'h hag a zo anvet an Ambazada. Da gentañ e oa al lec'h-se ur soñj gant kamaladed eus strolladoù skoazell euskarat : ar soñj e oa sevel ul lec'h etrebroadel er ZAD hag a c'hallfe servijout da greizenn degemer evit stourmerien eus ar bed a-bezh. Savet eo bet e-kerzh raktresoù sevel a-stroll a vode annezidi ar ZAD, stourmerien euskarat, ha stourmerien vreizhat. Al lec'h ma vez savet ul lod vras eus hon darvoudoù eo bremañ. Bep daou vloaz e vez aozet eno un darvoud anvet an Emgavioù Etregalaktek. Er bloaz-mañ eo bet savet pep tra gant Dispac'h. Ha pa n'omp ket bet an holl ac'hanomp ZADourien da vat, e vezomp stag ouzh ar ZAD memes tra, evel m'hon defe bevet eno, peogwir hon eus tremenet kalz amzer blijus. Evit echuiñ, d'ar poent ma oamp krog da stourm a-enep an aerborzh e seblante dibosupl bezañ trec'h. Met trec'h omp bet ! Ouzhpenn-se omp deuet a-benn da sevel ul lec'h hag a zegemer ar stourmoù all c'hoazh !

**Komzoù dastumet gant Julien Meffre**


## KARANTEZ MAMMOÙ

**Kanerez ha sonerez eo Justine Morvan er strollad Karaoke Social Klub [s.o. niv. 1013 Ya!]. Met estreget war al leurenn emañ ar vaouez eus Bro-Leon en hec'h aez : e bed ar c'hleweled ivez. Komedianez hag advouezhierez eo-hi. Ha sevenourez diwar-vremañ, gant an teulfilm "Karantez vamm" a zo bet produet gant Kalanna ha deuet er-maez e miz Even 2025.**

Un teulfilm 52 vunut eo "Karantez vamm". Kontañ a ra istor Rozenn ha Lizig, div lesbianez deuet da vezañ mammoù ur bugel kentañ ha divizet ganto heuliañ un eil hentad HSM. Camille Argouarc'h he deus savet goulennoù ouzh ar sevenourez evit Ya!

**Camille : Penaos eo deuet deoc'h ar c'hoant da seveniñ un teulfilm diwar o fenn ?**

**Justine :** Mignonez on-me da Rozenn ha Lizig abaoe bloavezhioù. O kaozeal gant Rozenn on em rentet kont ne ouien seurt war ar pezh he doa treuzet evit gellout bevañ en un doare seder he mammelezh gant he bugel Riwal. C'hoant am eus bet da zoonat ar goulennoù tro-dro d'an eilvamm gant un teulfilm. A-benn ar fin o deus kroget Rozenn ha Lizig gant ur raktres eil bugel, gant Rozenn o tougen ar wech-mañ. Evit ma chomfe poellek ar film em eus bet da azasaat tem ar film gant ar pezh a vent, kroget em eus neuze da heuliañ anezho war o hentad HSM.



**Camille :** Ha diaes eo bet deoc'h kaout o asant evit filmañ anezho, hag heuliañ anezho kement-se en o intimelezh ?

**Justine :** M'on onest ganin-me, ya. Diaes eo bet dezho laoskel ac'hanon da zont da filmañ o buhez prevez, ur striv eo bet bezañ heuliet

e-pad bloavezhioù war ur raktres ken intim. Gouzout a raen em boa c'hoant d'ober ur film warno ha war koublad all ebet. Unan eus an abegoù pennañ evit ma rofent o asant e oa ar fed o doa c'hoant Rozenn ha Lizig e vefe muioc'h a zanvez war seurt sujedoù, e vefe gwelet muioc'h a familhoù heñvelreizh war ar skrammoù. An eil e oa ar mignonij a zo etrezomp. Fiziañs o deus ennon, ar pezh a zo bet priziuz evidon e-pad ar filmañ.

**Camille :** Petra eo o soñj dezho diwar-benn ar film bremañ m'eo deuet er-maez ?

**Justine :** Keloù mat, mignonezed omp c'hoazh ! Ne'm eus ket c'hoant da gaozeal evito met laouen int bet p'o deus sellet ouzh ar film. Ha disammet. Gwasket e oant gant ar fed e c'hellfe bezañ distummet o buhez, o c'homzoù... A-benn ar fin e seblantont bezañ kentoc'h en o aez gant an teulfilm. Da'm soñj eo bet kreñvaet hon darempred gant ar raktres-se en un doare.

**Camille :** Pa ouzer eo bet aotreet an HSM e Frañs e-kerzh ar filmañ, petra en deus degaset ar cheñchamant-se er senario hervezoc'h ?

**Justine :** Ar cheñchamant lezenn en deus lakaet ac'hanon da gompren pegen suj e oa ar c'houblad ouzh al lezennoù evit gellout sevel ur familh. Kemplezh-kenañ eo ar cheñchamantoù lezennoù da verañ evito, daoust m'int titouret mat ha fri-furch a-walc'h evit mont da glask an titouroù drezo o-unan. Pa vez ur cheñchamant lezenn e rank ar merc'hed ober choazoù nevez. Met santet em eus ivez penaos e c'helle seurt lezennoù lakaat o statud familh da vont war-raok a-fed melestradurezh.

*\*hiliadur skoazellet ent-mezegal (HSM) : procréation médicalement assistée (PMA)*

Skignet e vo an teulfilm e lec'hioù disheñvel e Breizh e-kerzh mizvezh an teulfilmou (miz Du) :

- d'an 2 da 5e e Binig
- d'ar 4 da 8e e Rostrenn
- d'an 9 da 6 e Gwengamp
- d'an 19 da 8e15 e Lesneven
- d'ar 25 da 6e e Montroulez
- d'ar 26 da 8e e Karaez
- d'ar 27 da 7e e Penn-ar-C'hrann

Un teulfilm produet gant Kalanna Production ha France Télévisions gant skoazell Tébéo, Tébésud, TVR, Rannvro Breizh, CNC ha Procirep-Angoa.



E Festival ar filmoù lesbian ha benelour e Paris e vo skignet teulfilm Justine Morvan e deroù miz Du. © Kalanna Production

**Ouzhpenn ar gouel, hon ampartiz war-wel !**

**LAKAOMP AN HOLL REMZIADOÙ DA GEMER PERZH EVIT BREIZH**

**DIZOLOIT HON HOLL OBEROÙ WAR LEC'HIENN : WWW.PRODUITENBRETAGNE.BZH**

Poltrere : Adobe Stock - skoazellet gant : Sprededialah arTifisiele - Anzadur : L'Unique Équipe

## PRIZIOÙ USB 2025

D'ar Sul 5 a viz Here 2025 he doa Unvaniezh Skrivagnerien Breizh (USB) roet prizioù da aozerien bet savet levrioù ha skridoù e 2024. Un abadenn gaer e Ti-al-Levr Begerel, bet renet gant Michel Prizieg, Kadoriad USB. Ouzhpenn 300 skrivagner zo ezel eus ar gevredigezh.

### Priz Pêr-Jakez Heliaz (romantoù hag un danevell vuhez) :

— Priz kentañ : Herve ar Gall, evit "D'an emgann Morvan", An Alarc'h embannadurioù.  
— Herve Seubil gKernaoudour, evit "Dindan pavezioù Gwengamp", An Alarc'h embannadurioù.  
— Trede priz : Elian Ansquer, evit "Brilli, toñ, sardin...", ur vuhez labour er friturioù", An Alarc'h embannadurioù.  
Trugarekaet e voe Al Liamm, Al Lanv hag An Alarc'h embannadurioù, o doa kaset levrioù d'ar juri.

### Aozerien karedonet evit o danevelloù :

1/ Luc Morvan, evit "Ugent vloaz hep keloù".  
2/ Michel Cadiou evit "Boked gouez an Dreinded".  
3/ Jean Le Clerc de La Herverie evit "Kenavo er Bistro".



Michel Prizieg ha Thierry Châtel. © Dominique Bognet

Meneget :

— Amandine Cousineau evit "Kuzulioù ar viskoulenn".  
— Youenn Kaloneg evit "An holl a c'hall faziñ".

Tem ar bloaz-mañ a oa : "Un emgav a oa bet divizet ganeomp en ur preti-karter bihan a oa bet darempredet ganeomp e-pad hor studioù, met... goude kement a vloavezhioù hep keloù..." Embannete vo andanevelloù-se en un dastumadenn (enni testennoù brezhonek, gallek ha gallaouek) e miz Ebrel 2026 gant U.S.B.

Goulenn a ran digant skrivagnerien Breizh lemmañ o fluenn evit ar genstrivadeg danevelloù a vo aozet e 2026 !

**Thierry Châtel, kadoriad ar juri**

## 39<sup>vet</sup> LID KOLIER AN ERMINIG

**Bep bloaz e vez roet Kolier an Erminig da bevar den a ouestl o buhez da gas Breizh war-raok ha da skignañ he sevenadur. Aozet e vez gant Skol-Uhel ar Vro.**

El Liger-Atlantel, e Kastell-Briant, e oa bet enoret er bloaz-mañ :

**Jakez Bernard**, produer e bed ar c'hleweled ha prezidant kent Produet e Breizh ; **Gildas Buron**, istorour, klasker ha mirour Mirdi ar Paludoù-holen Bourc'h-Baz ; **Sir Barry Cunliffe**, arkeologour eus Bro-Saoz ha kelenner war



Ar re enoret gant Lena Louarn, kañsellerez an Urzh, hag Alan Stivell. © GM

an arkeologiezh en Oxford ; **Anne Auffret**, kanerez ha telennoerez vrezhonek.

**Anza** he deus resevet ur priz ivez. Ar plac'h yaouank he doa kanet e brezhoneg "Sinfonienn al luc'hed" gant

Zaho de Sagazan e festival an Erer Kozh.

40<sup>vet</sup> lid Kolier an Erminig a vo dalc'het e Plougastell-Daoulas e 2026.

**N. Gourvenneg**

## BEILHADEGOÙ DASTUM

Ar veilhadeg a zeu a vo d'ar Sul 19 a viz Here da 3 eur goude lein e Brest. Aozet e vo gant Dastum Bro-Leon ha Kreizenn an arzoù pobl (e sal Léo Ferré e Ti an holl e Bellevue, 1 straed Quercy e Brest).

### Programm ar veilhadeg :

Da gentañ e vo videobannet ar film "Dastum, la maison des sources" sevenet gant Giuseppe De Vecchi (52 mn, produet gant Sombrero & Co).

Da c'houde e vo ur veilhadeg teiryezhek (brezhoneg, gallaoueg ha galleg) gant kanaouennoù, sonerezh ha kontadennoù. Leurenn digor d'an holl.

Dalc'het e vo ur stand gant Dastum ha diskouezet e vo an embannadurioù diwezhañ : "Amzer, mor ha micher" gant Mikael Madeg ha "La chanson populaire de tradition orale en langue bretonne" gant Patrick Malrieu.



## — C'HOARIOÙ VIDEO —

### Clair Obscur : Expedition 33

Ma zo ur c'hoari en deus bet kalz a vrud er bloaz-mañ eo *Clair Obscur : Expedition 33*, diorroet gant ar studio Sandfall Interactive. Kevrinus e oa filmoù brudañ ar c'hoari, o kinnig ur bed teñval mod ar c'hoarioù Dark Souls, met gant ur gameplay heñvel diouzh ar c'hoarioù rol japanat (JRPG), gant emgannoù tro-dre-dro. Dic'hortoz eo neuze ar berzh bras en deus bet graet, hag ar burutelladennoù pozitivel-tre n'eus resevet. E Frañs eo bet lakaet muioc'h c'hoazh war-wel gant m'eo diazezet e Montpelhièr ar studio. Ul lodenn eus an dud eno a oa o labourat e Ubisoft a-raok, ha gouest eo bet an 30 den bennak da grouiñ un oberenn he deus sebezet ar c'hoarierezed hag ar c'hoarierien er bed a-bezh.

Kinnig a ra istor Gustave, Maelle, hag un toullad tud all, a vev e kêr Lumière, e tal ur roc'h bras gant ur niverenn skrivet warnañ. Digreskiñ a ra an niverenn-mañ a vloaz da vloaz, ha bewech ma tiskenn ez a da get an holl dud a oad gant ar pezh a zo livet war ar roc'h. Kregiñ a ra an istor pa vez livet 33 warnañ, ha loc'hañ a ra ur strollad tud 32 bloaz gant ar pal mont da lazhañ al livourez, a zo kablus eus an droug-se.

Kalz a gevriñoù a vo da ziluziañ neuze ha laosket eo ar c'hoarierien da glask kompren ar pezh a c'hoarvez e-pad pellik amzer a-raok na vefe diskuilhet ar penaoz hag ar perag. Rankout a raio ar strollad mont da gantreal en ur bed leun a livioù hag a euzhviled a-raok bezañ gouest da dizhout al livourez.

Gallout a ra ar strollad beajiñ war ur gartenn vras, ha mont e liveoù klasel lec'h ma rankont en em gannañ a-enep euzhviled. An emgannoù just a-walc'h, a zo unan eus perzhioù dibar ar c'hoari, hag a ginnig ur stumm tro-dre-dro, na vez ket gwelet kement er c'hoarioù a-vremañ, ha nebutoc'h c'hoazh e c'hoarioù savet gant studioioù ar c'hornôg. An doare c'hoari-se a oa bet brudet-mat gant c'hoarioù evel *Final Fantasy* pe *Dragon Quest*, hag a zeu war-eeun eus Japan kentoc'h.

Klask a ra *Clair Obscur : Expedition 33* meskañ an doare-se gant lodennoù

en amzer gwirion evit mont hebiou pe parraat tagadennoù an enebourien, un tamm evel ar c'hoarioù Paper Mario. Kalzik a sistemoù a zo tro-dro, ha pep tudenn a zo gant un doare dibar da c'hoari.

Brudet eo bet mat ar c'hoari a-drugarez d'ul lodenn bouezus all : ar sonerezh. Lorien Testard, ar sonazour, en deus enrollet ouzhpenn 8 eur zonerezh a-bep seurt, sikouret gant Alice Duport-Percier, ur ganerez opera. An tonioù Lumière (a zo bet troet e brezhoneg gant Mailys "Bretonne" ha kanet gant Korydwenn, da selaou en instagram) pe Alicia. Sonadegoù a vo aozet a-benn nebeut zoken.

Ur c'hoari savet gant ampartiz neuze, gant ur studio bihan a-walc'h, a zo deuet a-benn da souezhañ an dud er bed a-bezh. Poentoù un tamm gwanoc'h zo memes tra, n'eo ket sklaer-tre an etrefas, al level design a zo un tamm foutouilhek, ha pa vez c'hoariet e saozneg e teu da vezañ un tamm pounner an doare da vountañ an tu gall gant an tudennoù o huchal "putain" gant o zaol-mouezh e-kreiz ur frazenn e saozneg, da skouer.



Da brenañ war PC, PS5 hag Xbox - 50 €.

GM

## NEVEZ EMBANNET GANT KEIT VIMP BEV

**Al liorz marzhus gant Paul Mingant**


Un dastumad kronikennoù war al liorzhañ : penaos gounit legumaj ha derc'hel ur vevliesseurted pinvidik el liorz ? Danvez al lev-mañ zo bet skrivet a gronikennoù er sizhunieg Ya! etre miz Genver 2020 ha miz Kerzu 2023 gant Paul Mingant.

*Paul Mingant, bet kelenner istor ha geografiezh e lise Diwan, bet stummet war ar c'heografiezh met ivez war al labour-douar, ispisializet e bio. Tregont bloavezh a skiant-prenet war al liorzhañ met ivez kemend-all a vloavezhioù studial ar yezh.*

**Beaj Mael-Duina gant Goulc'han Kervella**

En inizi Aran, en Iwerzhon, er Grennamzer. Brendan, ur chaseour yaouank, zo bet lonket gant un aerouant. Bev eo atav avat, e kof an euzhvil. Mont a ra e c'hoar Mael-Duina da glask saveteiñ anezhañ e-bourzh ul lestr dre-lien. Ganti, er bourzh, ez eus un toullad moraerien yaouank. Harpet int gant an drouiz Nuca hag ar barzh Diuran. Douarañ a reont e c'hwec'h enezenn iskis a-raok en em gavout gant ar seizhvet hini, Enez varzhus an Aerouant.

*Ul leurenner, ur c'homedian, ur rener strollad c'hoariva hag ur saver pezhioù-c'hoari ha romantoù eo Goulc'han Kervella. Ganet eo d'ar 4 a viz Gouere 1951 e Plougern, en ur familh a vartoloded. Gant e strollad c'hoariva Ar Vro Bagan o deus graet berzh an arvestoù brezhonek ha gallek diskouezet da viliadoù a dud.*

**Jozefin Penkaled gant Tinaïg Maugard ha Mailis Maugard**


Start eo buhez ar maouezed a labour en uzinoù sardin e Douarnenez e penn-kentañ an XX<sup>vet</sup> kantved. En o zouez emañ Jozefin, poaniañ a ra evel ar re all el labouradeg. Cheñch a raio he buhez hag hini ar Pennoù Sardin all pa savint asambles evit o gwirioù hag a-enep o doareoù labour poanius. Ur romant istorel awenet gant buhez Jozefin Penkaled, Penn Sardin anezhi hag unan eus ar maouezed kentañ bet dilennet evel kuzulierez-kêr e Frañs.

*Tinaïg Maugard, he deus skrivet an istor-mañ evit lakaat war-wel ar maouezed o deus c'hoariet ur perzh bras e istor Breizh. Studierez eo war ar brezhoneg e Roazhon 2. Plijout a ra dezhi mont da gaozeal gant brezhonegerien ha brezhonegerized kozh e bro-Vigoudenn, e lec'h m'emañ he zud kozh o chom. He c'hoar Tinaïg he deus kemeret perzh er raktres-mañ en ur grouiñ dour-livajoù da skeudennaouiñ istor Jozefin Penkaled.*

**Japan gant Julia Atzeni**

Petra eo Menez Fuji ? Penaos e vez debret ar predoù ? Petra a vez lidet ? Penaos eo an tiez ? Un teullevr da ziskouez buhez, kustumoù ha sekredoù bihan Japan !

*Julia Atzeni zo animatourez skiantel ha tresourez. Krouet he deus ar bajenn « Lapined » en Instagram evit sevel danvez e brezhoneg.*

**Tommadur an hin : kefridi Tara en Arktika gant Lucie Lemoine ha Sylvain Dorange**

Anavezout a ra mat Billy ar mor ha tommadur an hin : studiañ a ra he mamm ar skornegoù o teuziñ e bourzh ur vag skiantel, ar oueletenn Tara. Kinnig a ra Billy pediñ er bourzh tud yaouank eus pep korn eus ar bed, en o aez gant an teknologiezhioù nevez, evit sikour da gizidikaat an dud. Setu penaos e teu Vadim, Josephyn ha Moussa en akipaj evit ur veaj skiantel a gaso anezho pelloc'h eget ar c'helc'h polel !

*Un avantur ekologel birvidik evit kompren gwelloc'h penaos e cheñch hor planedenn hag ar meurvorioù abalamour da dommadur an hin.*



**Emgav en hor stand e Gouel al Levrioù e Karaez d'ar 25 ha d'ar 26 a viz Here**

**hag enlinenn adalek ar 25 a viz Here e [www.keit-vimp-bev.com](http://www.keit-vimp-bev.com)**

## SINEMA

gant Yann-Glaod Ruied



## LA FEMME QUI EN SAVAIT TROP

Ur film germano-aotrichian sevenet gant Nader Saeivar (2024).

Gant : Maryam Boubani, Nader Naderpour (1e40).

Pouezuz eo lâred ema bet savet ar senario war un dro gant ar sevener e-hunan, Nader Saeivar, ha gant Jafar Panahi, Anavet mat eo Jafar Panahi gant e filmoù é tiskouez buhez e vro, an Iran, dindan renad ar Vollahed, a-c'houde 1979. Toullbac'het eo bet ouzhpenn ur wezh e prizon Evin, e Teheran, ha liez e oa bet deroet prizioù dezhañ, ha n'helle ket kuitaad e vro evid o resev. Gant e film nevez, **Un simple**

**accident** (ha eñv sevener) ema waet ar maout ar bloaz-mañ e Cannes. Ar film-mañ, savet dre guzh en Iran, a gont istoer Tarlan, ur vaouez bet kelennerz dañs (evel he lezverc'h), hag a zo bet test ag ur muntr, hag a glask lakaad ar justis d'ober he labour. Mez en Iran eh omp. É vout m'ema ar muntrer ur penn-braz er sistem, e klasko ar sistem henn difenn par ma c'hello, heb re a ziazamantoù : petra a dalv

pouez un den hebkén, ur vaouez gozh ouzhpenn-se, hag a sav eneb d'ur galloud politikel hag a ra goab ag an demokratiezh ? E toud an diktaturezh, ar re savet diwar ur relijion bennag pe diwar ur materializm kaled, kalavern peheni, e sav an heol bemdez war ar vro hag e ra glaw da beb an amzer. Er ruioù e roul an otoioù ; er garioù e c'hortoz an trenioù o eurioù loc'hañ kuit ; war ar maezou e east ar beizanted o blead hag en uzinioù e ra ar labourizion o jestoù kustum. Peb unan a sav beb mitin, en em wisk hervez an amzer hag a ev ur lomm kafe bennag pe m'oar-me petra kent kuitaad an ti. Ha gant un torchouer e sec'h an dud o listri. Gwalc'het e vez an dilhad ingal, prenet boued war ar marc'hadoù pe en ur stal bennag pa vez red. Ha paeet an tailhoù. Ha kaset ur mesaj, lennet ar journal, ha pellgomzet, ha chelaouet douzh ar radio, pe sellet douzh an tele ha kement zo. Ar vuhez eo, buhez an

denion, kalavern o bro, ar rannvloaz, liw o c'hroc'henn pe o relijion. Rag war an Douar a-bezh eh eus jestoù pemdezieg kumun da beb den. Jestoù zo, hag a rankomp oll ober, mod pe vod, ha ne santomp ket e vevennont hon frankiz, a-gaoz m'emaint lodeg e stad hon denegezh. Mez broioù zo ha n'hell ket an dud ober ar pezh a garehent ober enne. Broioù zo lec'h ma ranker plegañ douzh lezennoù ur vinorelezh tapet ar galloud ganti ha c'hoant dezhi lakaad an oll da heuliañ ar pezh a ziviz. Diaez e vez d'ar re m'ema ar galloud politikel gante chomel heb moned re bell ganti. Ha re liez eh aont re bell. N'eo ket nevez diskoueziñ ruster ha falloni renad Mollahed an Iran, ha rustoc'h ha falloc'h c'hoazh e-keñver ar merc'hed. Filmoù interesuz-braz zo bet savet war an tem-se, ha warlene c'hoazh, evel **Les graines du figuier sauvage** (Mohammad Rasoulof) pe **Lire Lolita à Téhéran** (Eran Riklis).

Politikerezhioù stard eneb d'ar poblañsoù a c'hell boud kaset da-heul un ideologiezh pe ur relijion bennag. Pa vez e anv an Izlam e ver sur gweled frankiz an dud krennet mat, pa laka an Izlam ar relijion hag ar politik war ar memez live. Arabad boud souezhet neuze gwelet an daou live-se kontrollet gant ur renad savet diwar reolennoù an Izlam. Daoust d'ar mekanik boud lojik, daoust d'an arvesterion gouied penaoz e achuo fall an afer, dre vraz d'an nebeutañ, diskoueziñ a ra fin ar film ur skeudenn vraw, dic'hortoz mez barzhoniell ha simbolel. Hag ar skenenn-se hon laka da soñjal e c'hell ar frankiz kavoud meur a hent evid disklosañ en-dro, goude boud bet mac'homet ha gwasket stard. Ha n'eo ket re ive gweled, gant ar jenerik, un nebeud portredoù a lod ag ar merc'hed ha maouezed o deus kollet o buhezioù en o stourm eneb d'ar ouel dre red war o fennoù. Sujañ d'ar wazed pe mervel evid ur pezh dilhad...

## KRONIK AN ERMINIG

gant Thierry Chatel

**Emañ Minig o pourmen en ur c'hoadig tost da Gemperle, ennañ faou ha derv kozh. Diaes eo eviti mont war-raok ken strouezhek eo er c'hoad-se...**

Spurmantiñ a ra div askell-groc'hen o paouez difloupañ diouzh toulloù ur c'hef-dervenn kozh-Noe : 5 cm hed, 28 cm digorded, 12 grammad dezho moarvat. Divskouarn hir-tre o deus.

Ar par a grog da chaseal met chom a ra tost-tre d'e annez, (1) \*100 / \*200 / \*300 metr d'ar muiañ tro-dro d'e zoull. Ar barez a bella betek ur c'hilometr, ha kavout a ra ur bern preizhoù : c'hwiled, biskoul, pugnez, klorege, c'hwen-gouez, kevnid, kelien, fubu-flemm...

Bremañ e sell Minig ouzh ar par adarre: nijal a ra war ar gernaoueg<sup>1</sup>. Goude, da dapout preizhoù all, e tiskenn dindan ar faou. Darnijal a ra a-rez d'ar struzh, evel ur valafenn, ha tost-tre d'an douar zoken... Ar moustrouzoù bihanañ a vez klevet gant e zivskouarn hir : stlakadennig divaskell un dipter, ur viskoulenn o ruzañ dousik war un delienn... Hag eñ o lonkañ balafenned-noz a-us d'ur vodenn !

Betek 5 m e tizh e usstenioù<sup>2</sup> al loenedigoù a fell d'ur c'houperell Bechstein



Gousperell Bechstein - *Myotis bechsteinii* © Gilles San Martin

spislec'hiañ.

A-greiz-tout e tremen ar par a-rez da benn Minig o huchal :

"Temat tit, Timesell Erminig ! Tegemer mat e tomani Kousperelled Bechstein !"

— Minig : Mat an traoù ganit ? Komprenet em eus da vrezhoneg, met souezhus eo da stumm-lavar !

— Myotiz : Va digarez ! Gouest on da gomz hep kaletaat ar c'hensonennoù pa ran strivadennnoù... Levezonet eo bet emichañs ma isemouez

gant yezh ar skiantourien o devoa anavezet ma hendadoù diouzh an eskell-kroc'hen all !

En Alamagn eo e voe dizoloet ma spesad. Da gentañ gant an Doktor Johann Leisler eus Hanau. Deskrivet e voe ez resise 1818 gant al loenonour Heinrich Kuhl. Embannet e voe gant ar skiantour-se un studiennoù war an eskell-groc'hen, ha war ar (2) \*perokeded / \*struskañvaled / \*c'holibried... Evit enoriñ ar zoologour Johann Matthäus

Bechstein, en doa erbedet ma vefe gwarezet an holl logod-dall, e voe savet an anv-spesad da heul gant Heinrich Kuhl : *Vespertilio bechsteinii*. E 1920 e tiogel al loenonour gall Anselm Desmaret n'eus askell-groc'hen ebet a-seurt-se e Bro-C'hall... rak den ebet n'en doa gwelet ac'hanomp a-benn neuze... An naturelour alaman Johann Kaup a zivisas e 1829 krouiñ ur genad nevez, "Myotis" ! Neuze, gant ar ouizieien e voe cheñchet anv

ma spesad, a deus da vezañ *Myotis bechsteinii* !

Gant TermBret (ur bodad eus Ofis ar brezhoneg) e voe troet ma anv e brezhoneg war-dro 2003.

E fin miz Eost en em c'hronnañ pared ha parezed, deuet a bell, ar pezh a starta an diseurtegezh genadel. En em barañ a reomp. Goude ec'h a pep hini diouzh e du... Ar parezed en em adkav e miz Ebrel. Stummañ a reont tredadennoù e lec'hioù a deuio da vezañ gwilioutioù e miz Gouere.

Ret e vo d'ar pared yaouank kuitaat kornad o ganidigezh. Mont a raint d'en em staliañ pelloc'h !

22 vloaz-pad e c'haller bevañ. Gant ma chomo gwez kozh toull (kuzhiadelloù enno evidomp, toulloù piked da skwer), mougevioù, pontoù... Etre miz Here ha miz Meurzh e vezomp o c'hoañviñ.

Dimezell Erminig, ha goût a rez penaos e reomp evit bezañ anavezet gant izili all hon trevadenn ? Dre borc'hadur<sup>3</sup> gwagrennoù (3) \*hor revr / \*hor fas / \*hon divaskell ?

<sup>1</sup>canopée

<sup>2</sup>ultrasons

<sup>3</sup>sécrétion

Responoù : (1) 100. (2) Ar perokeded. (3) Hor fas.

## SONEREZH

gant Gaetan Boulig

## AR PUNK ER STADOÙ-UNANET : AR CBGB (1/2)

E 1976 eo echu brezel Viet-Nam, un disamm evit ar Stadoù-Unanet. Al lugan "peace and love" en doa merket an eil hanterenn eus ar sixties a goll eus e nerzh a daol-trumm. Steuziet eo an aon da vezañ galvet d'an talbenn ha da vervel e rizegoù Azia ar reter. Kenavo an uhelvennadoù hag ar c'hoant da vezañ a-stroll, plas d'an hiniennelouriezh ha d'an Do it yourself ! Ul leurenn nevez a zeu war-wel e New York a-drugarez da gleuboù evel ar CBGB hag ar Max' Kansas City, gant strolladoù a fell dezho skubañ ar bed kozh.



The Ramones © Danny Fields

En em staliañ a ra Patti Smith e New-York e 1967. Levezonet gant Rimbaud ha barzhed ar beat generation (Ginsberg, Burroughs ha Corso), e skriv barzhonegoù e karnedoù bihan. Diazez he c'hanaouennoù e teuint da vezañ, adalek 1971 e krog da zibunañ anezho dirak an dud gant Lenny Kaye ouzh ar gitar. Dibarelezh he sonerezh a vo ar meskaj-se etre rock ha barzhoniezh. Ha degouezhout a ra just e koulz, echu eo gant The New York Dolls, gortoz a rae New Yorkiz gwad nevez, kavout a reont anezhañ gant ar bladenn Horses produet gant John Cale.

Pell emañ Patti Smith diouzh ar c'hlichedoù punk a gavimp e Bro-Saoz rak liesseurt eo ar punk US gant levezonioù a bep seurt : ar rock garage, ar beat generation, ar jazz, ar varzhoniezh.

## Country, bluegrass, blues... ha punk !

An eil arzour pennañ eus an darzhadenn punk e New York eo Tom Verlaine. Gantañ e enrollo Patti Smith he single kentañ *Hey Joe* dediet da Hendrix, an tu *B Piss Factory* a gont he disparti diouzh an uzin ha kondisionoù labour ar merc'hed eno.

Ar memes bloavezh ha Patti Smith e erru Tom Verlaine e New York gant e vignon Richard Myers, anavezet evel Richard Hell un nebeud mizvezhioù goude. Gant an tabouliner Billy Ficca hag

ar gitarour Richard Lloyd e savont ar strollad Television. D'an 2 a viz Meurzh 1974 e roont o sonadeg kentañ en Townhouse Theater met fulenn deroù ar punk a c'hoarvezo un nebeud sizhunvezhioù goude. Tremen a ra Verlaine ha Lloyd dirak ur c'hleub reuzeudik en East village, ar CBGB. Perc'henn an ti a fell dezhañ gouestlañ al lec'h d'ar country, bluegrass ha blues (CBGB). E gwirionez e teuo da vezañ lec'h emgav holl bunked New York. Goulenn a ra Verlaine hag-eñ e c'hellfe ar strollad seniñ er

c'hleub d'ar Sul. Enaouet eo ar vouchenn : seniñ a raio Television bep sul e-pad 6 miz heuliet gant un toullad strolladoù a seblant diwanañ a bep tu.

Bamet eo Patti Smith dirak Television. Tom Verlaine a zeu da vezañ he mignon. Horses, albom kentañ ar ganourez a resev un degemer a-feson pa vefe gant ar publik pe gant ar skridvarnerien. Un nebeud mizvezhioù goude eo tro Television da sinañ gant Elektra, al label en doa dija sinet The MC5 ha The Stooges. E 1978 e embann ar strollad un eil pladenn met splittañ a ra er mizvezhioù da heul.

Hogen evit kalz a dud eo ar Ramones arouez ar punk rock amerikan : sonerezh, look, emzalc'h, c'hwitadenn genwerzhel ha levezon war ar remziadoù da zont, amañ emañ an holl elfennoù evit dont da vezañ mitik !

## Ur vandennad paotred tagnous


N'o deus Johnny, Joey, Tommy ha Dee Dee Ramone liamm kerentiezh ebet met dont a reont holl eus banlevioù New York. Tommy zo ganet e Budapest e fin ar bloavezhioù 40, e familh, yuzev, he deus echapet d'an holokaost, kuzhet gant amezeien. E 1956 e tec'hont ar bloc'had komunour evit en em staliañ e Brooklyn. E-pad e vloavezh kentañ el lise e Forrest Hills e ra Tommy anoudegezh gant Johnny Cummings, mab ur micherour eus ar Bronx.

Skoet gant e dad eo feuls Johnny d'e dro, o klask cheu ingal hag o spontañ an amezeien betek e 20 vloaz. Un deiz e kejont gant Doug Colvin, a zeuio da vezañ Dee Dee Ramone. Hemañ zo bet diaes e vuhez ivez betek-henn : un tad soudard a gas e familh d'e heul da Alamagn, stank ar chikanoù etre e dud, an taolioù ivez, kavout a ra repu en drammoù. P'emañ 15 vloaz e tisparti e dud, en em gavout a ra er Queens gant ur vamm alkoholik. "Normal eo e vefen bet sachet war-zu tud evel Tommy pe Johnny, bez' e oant bad guys ar c'harter, ne oa den ebet evit krediñ en o dazont". Den ebet, war-bouez Tommy hag a vroud e zaou vignon da sevel ur strollad. Mont a ra Dee Dee da gerc'hat ur mignon all evit bezañ ouzh an taboulinoù : Jeffrey Hyman, Joey Ramone. Hemañ en deus bet kudennoù yec'hed abred. Gant e neuz vresk hag e abafded e veze harellet ingal er skolaj. Diaes eo dezhañ daremprediñ an dud, chom a ra e-unan, en ur ger eo ur paria bet chomet ur mizvezh en un ospital evit skizofreni paranoid. Chom a raio e vuhez-pad gant strafuilhoù emlzh. E repu : ar rock 'n roll ! Neuze pa ginnig Dee Dee dezhañ bezañ er strollad e asant kerkent. N'eo ket entanet Johnny, evitañ eo Joey un hippie o plavañ, tra ken. Ne vern, ganet eo ar Ramones gant o anv o tont eus an anv faos, Paul Ramon, implijet gant Paul McCartney pa felle dezhañ beajiñ incognito.



Lenn, sellet ha selaou gant TES

## MANER-AN-AOD



Deomp da bourmen da-heul Kaou ha Nola betek Maner-an-Aod, ul lec'h kevrinus ma'z eus unan. Ma fell deoc'h mont pelloc'h ganto avat e rankoc'h mont war lec'hienn TES evit lenn pe selaou ar romant-se enlinenn e stumm un EPUB. Meur a romant all a c'hallit lenn er stumm-se.

## I. Koñchennoù mamm-gozh

Plijout a rae dreist da Gaou ha da Nola, ar c'houlblad gevelled, mont asambles d'ar kol, diouzh ar beure, pe glav pe heol, pe klouar pe freskik e vije. Rak evel-se e c'helle ar paotrig kontañ koñchennoù d'e c'hoar – koñchennoù mamm-gozh pe istorioù ijinet gantañ. Ha Nola a selaoue anezhañ aketus, entanet gant an darvoudoù a ouie Kaou fardañ kaer. « Kont din 'ta, Kaou ! »

Kaou, avat, ne responte ket diouzhtu kement ha lakaat anezhi da champalat gant dibasianted. « Gortoz ur pennadig ! »

Kregiñ a rae da redek, da lammat, d'ober ardoù koulz ha lakaat Nola da c'hoarzhin leizh he genoù. Amzer dezhañ da gavout un tamm astenn d'an istor, kea !

« Ur wech e oa, ur wech ne oa ket hag ur wech e oa bepred ! »

E-giz-se e krog ar c'hoñchennoù, a ouezoc'h.

« Ur wech e oa ur maner, e-kreizig-kreiz un enezenn. Kevrinus e oa al lec'h rak, hervez kont, e veze hentet. Tud zo o doa gwelet un tasmant o pourmen er solier... »

« Ro peoc'h din gant ar randonenn-se, Kaou ! Maner-an-Aod, Maner-an-Aod adarre ! »



Tresadennoù : M'alo ar Menn

GANT FRILOUZ



C'HOARIOÙ

GERIOÙ-KROAZ

gant J.-F. Peden – K845 (Etre)

	I	II	III	IV	V	VI	VII	VIII	IX
1					■				
2									
3								■	
4		■				■			■
5							■		
6				■					
7			■			■			■
8									
9	■				■				
10								■	
11									

A-BLAEN :

- **1.** Dirak ugent pa vez brasoc'h eget ugent ha bihanoc'h eget tregont. Eta, 'ta. – **2.** "Raed glas" a zo un anv all (daou c'her 5/4).
- **3.** En ul lec'h izeloc'h emañ. – **4.** C'hwegont munutenn. Mont goustadik (war e ...). – **5.** Un dañser a dro. Arouez post ar Vermont. – **6.** E oa brokus (vd\*). A bourmene war droad (vd\*).
- **7.** Rakger heñvelster da "ad". Kreiz Breizh. Aluminium ar c'himiour. – **8.** Unan a gomz yezh Churchill. – **9.** Ret. Horzh an torrer-mein. – **10.** Keizh. – **11.** A lakae prenistri goude bezañ graet toullou er voger (vd\*).

A-SONN :

- **I.** Tour-tan etre Beg ar Raz hag Enez Sun (daou c'her 4/4). An terbiom. – **II.** Ur stêr e Bern (e Suis). Labour an hini a fard boued. – **III.** Gwagenn klasket gant ar "seurferien". A zeue da vezañ koshoc'h (vd\*).
- **IV.** Bez' ez eus kalz anezho. D'an 19 a viz Here war an deiziadur. – **V.** Fardañ, aozañ. 32 evit Mendeleiev. – **VI.** Bezañ, trede gour unan, stumm lec'hiañ (vd\*).
- **VII.** Doue Heol en Ejipt gwechall. Emedos, berroc'h (vd\*). – **VIII.** D'ar 1añ a viz Meurzh. Lambig, odivi. – **VIII.** Kosteze un tric'horn. Evel gwin distouvet re abred (vd\*). – **IX.** Roe e asant (vd\*). Kerzhe evel ma vefe pounner e dreid (vd\*).

\*vd = verb displeget.

SKINWEL

FRANCE 3 BREIZH

BALI BREIZH – D'ar Sul 19 a viz Here da 9e55

Ur c'houlzad nevez a grogomp disul e Bali Breizh. E Kemper e vimp e-pad ur miz. Evit an abadenn gentañ e krogimp er vediaoueg Alain Gérard. Eno e raimp anaoudegezh gant Maryse Evrain, he deus labouret er vediaoueg e-pad pell, ha gant Klervi Mandon, a labour eno bremañ. Da heul e adkavimp a c'haner Denez er stal-uzin Armor-Lux, evit un ton asambles gant ar strollad O'Tridal. Komzet e vo ivez gant al levezonour internet Gwenvael Balnois, anavezet gwelloc'h gant anv e gont Instagram "Komz Brezhoneg".

PODKAST

ARVORIG FM

TROUZ ER GÊR – Diorren ar brezhoneg

Daou bennad kaset gant Erwan Blanchard diwar-benn diorren ar brezhoneg :

- Loig Jestin, karget gant ar bedagogiezh e Stumdi, a ginnig "A-zevri", stummadur nevez ar greizenn stummañ
- Mazeaz ar Brun en deus roet lañs da zDaeadenn ar 1000 familh gant ar pal krouiñ ur rouedad kenskoazell etre ar familhoù o deus c'hoant implijout ar brezhoneg er gêr

Ur podkast da selaou e : <https://www.radiobreizh.bzh/fr/episode/76033>

A LINENN DA LINENN

Loc'hit eus TRED  
Savit ur ger all da bep linenn,  
o cheñch ul lizherenn hepken.  
Hag echuit gant PLAS

T	R	E	D
P	L	A	S

Skubañ ar mor gant Paskal Hervio



Pevar skrid a ya d'ober an dastumad-mañ. En hini kentañ, Skubañ ar mor, en em gaver e Breizh er bloavezh 1914 hag aet eo diwar wel Kolaz Mibin, ur paotr kozh anezhañ. Kaset eo ar c'homiser Filochard war an tach, eus a Bariz, evit diluziañ an afer. Ur muntr a zo bet, kredapl, ha kerkent e soñj da Filochard en deus kavet ar muntrer e-touez an enezidi ha dre lizher e tispleg pep tra d'e vamm. Skrijus ha mantrus an degouezh pa vo disoc'h an afer avat. Evit an eil skrid, Koulzad ar sivi, en deus adaozet Paskal Hervio ur romant bet skrivet gantañ : Texüe, tasmant kastell Brest. En dro-mañ avat ez eus bet degaset ul luziadell a bouez : skarzhet eo bet al lizherenn E, setu ma c'heller lenn un istor disheñvel mat a-benn ar fin hag ar yezh gwariet un disterig hag ar c'heriaoueg bet dibabet a zegas kalz fent. E dibenn al levr ez eus div zanevell aet ar maout gante e kenstrivadeg Ti ar Vro Kemper hag embannet er gelaouenn Al Liamm.

>> Embannet gant Al Liamm - 13 € - 142 p.

Diskoulmoù

S	V	T	d
G	V	T	d
G	V	T	d
G	V	T	d

3	H	I	S	3	N	3	H	R
Z	1	0	0	1	0	0	1	
0	1	0	0	0	1	0	0	1
0	3	0	3	0	3	0	3	0
0	3	0	3	0	3	0	3	0
3	3	1	1	1	1	1	1	1
3	3	1	1	1	1	1	1	1
1	1	0	0	0	0	0	0	0
N	V	N	0	Y	0	0	0	Y
0	0	0	0	0	0	0	0	0
S	N	0	0	0	0	0	0	0
Y	1	N	3	N	Y	M		

## DIEUBOMP AR RIBOUL !

Souezhet on bet o lenn kronikenn Manu e niverenn 1055 Ya ! gant un titl e galleg, "Rêves parties". Kenkoulz e vo din enaouiñ Cnews ar wech a-zeu ! Nag a rakvarnioù, klichedoù ha dizonestiz pa ziskriv ar c'hronikenn gant un ton dismegañsuz an deufourien e-giz tud lous, saotrus, tud eus kêr deuet da spontañ laboused ! Ar riboulerien a vefe kiriek eus distruj an natur bremañ ? Prouenn ebet degaset gantañ koulskoude panavet un tamm lastez en defe gwelet ur wech en ul lec'h bennak. Ma, n'eo ket ar pestisidoù ken a lazh boued

al laboused kea ! Na taolioù fuzul ar chaseourien ? Evel just ez eus un efed war an natur gant kement obererezh mab-den. Ya, trouz a vez gant an dirollabadennoù, ha bep an amzer e c'hell an amezeien bezañ direnket. Met an direnkusañ maorvat eo ne vez ket mestroniet ar festoù-gouez se gant ar sistem. Ha neuze eo politikel eo ar festoù-se. Digoust int. Aozet hep skoaziad publik pe brevez. Emaozet e vezont. Hag evit kalz tud int an degouezh nemetañ e-lec'h ma c'hellont en em santout dieub hag en o aes gant tud all. Digor int da neb

a fell dezhañ pe dezhi, hep na vefent barnet gant den, keit ha ma 'z int doujus ouzh ar re all.

N'eo ket bet skrivet gant ar c'hronikenn eo boaz an archerien bremañ da reiñ an taol-kastiz 135€ da gement den en deus kemeret perzh er festoù-se. Sur a-walc'h n'eo ket trawalc'h dezhañ, e-giz an deputeed o deus sinet ur c'hinnig lezenn e miz Meurzh tremenet, ha soutennet gant Retailleau, evit kastizañ betek 6 bloaz toull-bac'h an aozerien, e-giz e ma vez graet e Italia Meloni. Ha petra 'soñj eus feulster an archerien

e-pad rave-party e Redon e 2021, pe c'hoazh eus marv Steve Maia Caniço e Naoned e 2019 ? Ar pep pouezusañ eo mirout kousto-pe-gousto d'ar re yaouank riboulat, bevañ ur mare a-gostez d'ar Bed dispi zo bet laosket dezho war a seblant.

Ha gaou adarre pa skriv Manu e vez nac'het bepred gant aozerien ar free-party kement doare da sternañ an traoù. Eskemmoù zo bet etre aozerien ha prefeti Penn-ar-Bed e 2016. Met n'eo ket gant diferadoù-prefed evit difenn kement "bodadeg doare fest gant sonerezh", en ur sezisañ

bepred an dafar sonerezh hag o reiñ taolioù kastiz e vo sioulaet an darempredoù etre an aozerien hag ar pennadurezhioù. Miliadoù a dud o deus manifestet er Vro d'an 12 a viz Ebrel tremenet evit kaout ar gwir da vevañ o entan evit ar festoù tekno. Setu laoskomp ar rakvarnioù a-gostez kement hag ar c'hoant da vestroniañ ar re all penn-da-benn, ha sur e vo tu kavout diskoulmoù evit ma c'hellfe pep hini bevañ e blijadur ha doujañ ouzh an natur hag an amezeien war ar memes-tro !

Divi Kerneis

## A-ZIVOUT KENTEL VREZHONEG YANN GERVEN

Lenn a ran peurliesañ gant dudi ar c'hentelioù brezhoneg savet gant Yann Gerven hag embannet e-barzh Ya!. Ha dre vras e klaskan en em vataat anezho pa skrivan danevelloù pe romantoù. N'emaon ket a-du avat gant e bennad a-zivout "Dibennoù en -et en anv-verb", e-barzh an niverenn diwezhañ (niv. 1057). Yann Gerven a fell dezhañ mont diouzh ar yezh komzet, ar parlantoù, evel ma oant en XX<sup>vet</sup> kantvet. Padal n'eo ket poell ar yezh lennek, ar yezh skrivet, heñvel ouzh poell ar yezh komzet. Reizh eo e klaskfe ar yezh skrivet kaout dibennoù anv-verb

diforc'hus. Ar re o deus savet an diforc'h-se n'o deus graet nemet kas pelloc'h an dibenn -out a veze er penn kentañ hepken er verboù savet diwar *bout* (bezañ), evel *gouzout*, *anaout*, *c'hoarvezout*, ha ledanaet buan ouzh verboù all evel *kavout*, *degouezhout*, *fiziout* da skouer, adalek mare ar c'hrennvrezhoneg (sl. *Yezhadur istorel ar brezhoneg*, gant Roparz Hemon, embannet gant Hor YEZH, p.183). Ne vern penaos, n'eo ket abalamour ma ne gaver ket an dibenn -out en atlasoù e ranker e zisteurel. Piv 'oar e pe stad e oa ar yezh komzet

er c'hantvedoù a-raok ? Ne vez ket degemeret ar stummoù anv-verb diwar stadegoù hepken, diwar ur poell diforc'hus ne lavaran ket. Cheñch traoù a zo degemeret er yezh skrivet abaoe ur c'hantved pelloc'h, ne ra nemet degas mesk ha strafuilh. Derc'hel a rin neuze da ober gant *gwelout* ha *mirout*. Hag evit respont d'ar fent a blij da Yann Gerven a-zivout an distagadur "biroute" ha "fausse route", e lavarin eo ken gwazh distagañ *miret* evel "mirette" pe *gwelet* evel "goélette" !

Fulup Lannuzel

## BARZHONIEZH

gant Gwilherm

### Ar bugel kuzhet

Tap ma dorn ha na chom ket da-unan.  
Bez fiziañs ennout paotrig, n'out ket gwan.  
Sell 'ta, an amzer dazont a zo splann.  
Kerzhomp asambles a-enep an tan !

## GANT DRIG

"BRASAÑ GAOU AR C'HANTVED EO  
CHEÑCHAMANT AN HIN", EME  
BRASAÑ GAQUIER ER BED



## GALV PREDER 2025

### Ezhomm hon eus ac'hanout !

Brezhoneger out, c'hoant ganit kemer perzh en un aozadur brezhonek troet war du an dazont ha diorreadur ar yezh ? Abaoe 1958 ez eo Preder an ti embann a labour start da sevel gerioù nevez da dreiñ ha da skrivañ testennoù arbennik war danvezioù lies (skiantoù, kalvezerezh, prederouriezh, h.a.). Ar braz eus al

labour kaset a-benn gant imbourc'herion arbennikaet zo bet embannet e geriadurioù ha lakaet hegerz war internet. Evit derc'hel gant hon labour emaoamp o klask tud youlek, nerzhus, a venn ober eus ar brezhoneg ur yezh par da yezhoù all, e-tailh da lavarout ha da gompren ar bed kempred. A bep seurt aeladoù a glaskomp :  
- merourion ha kontourion ;

- stlennegourion ;  
- skrivagnerion arbennikaet war un danvez resis pe barrek war ur yezh all estreget ar galleg ;  
- tud da reiñ dorn evit traoù pleustrek (kas lizheroù, kempenn, aozañ darvoudoù...).

Deuet mat eo pep hini desachet gant hon labour ! Kae e darempred ganimp : [ma.preder@gmail.com](mailto:ma.preder@gmail.com)

## TI AR VRO DINAN A GINNIG

Da welet e ti al levrioù e Begerel (straed Montfort) etre an 30 a viz Gwengolo hag an 21 a viz Here :

- D'ar Merc'her 15 a viz Gwengolo da 2e30 : gweladenn heñchet gant Erwan Hupel, kelenner er skol-veur Roazhon 2, aozer un desenn diwar-benn Gwalarn.

Da heul, da 4e e vo skignet an teulfilm "Naig ha me" aozet gant Claire Villalon. Deskrivañ a ra Claire ar skrivagnerez e brezhoneg Naig Rozmor evel "ur vaouez, kalonek hag awenus". Dizalc'het he deus d'he zro ul lennegezh a zo meur a dal dezhi. Teulfilm e brezhoneg istitlet e galleg.  
- D'ar Sul 19 a viz Here da

4e30 : diskouezet e vo an teulfilm "Naig ha me". An diskouezadeg a vo da welet c'hoazh.

Aozet gant Ti ar Vro Dmeurance Dinan gant kevelerezh Ti al Levrioù.

Evit gouzout hiroc'h : <https://maisondulivredebacherel.fr/evènements/>

Ya !, Sizhunieg  
Journal hebdomadaire N° 1059  
du mardi 14 octobre 2025

2 € an niverenn / le n°  
100 € ar bloaz / l'année  
N° CPPAP : 0622 C 86790  
Embannet gant / édité par :  
Keit Vimp Bev, 29270 Karaez/Carhaix  
02 98 26 87 12  
Renner embann / Dir. publication :  
G. Gwenn, [darempred@ya.bzh](mailto:darempred@ya.bzh)  
Kenurzhiañ & maketenniñ /  
Coordination & mise en page :  
N. Gourvenneg, [nikolaz.kvb@gmail.com](mailto:nikolaz.kvb@gmail.com)  
Koumanantou / Abonnements :  
M. Gallais, [keit-vimp-bev@wanadoo.fr](mailto:keit-vimp-bev@wanadoo.fr)

Skoazell adlenn / Aide à la relecture :  
OPAB / OPLB



Moullañ / Impression :  
Le Télégramme  
7 voie d'Accès au Port,  
BP 67 243  
29672 Montroulez / Morlaix Cedex

Ar pennadoù sinet ne engouestlont nemet kiriegezh ar re o deus o skrivet.

## KRONIKENN MANU

## ALLO MAMMIG BOUBOU

Er sizhun-mañ, un taol imor gant Manu diwar-benn ar mod ma vez enebet ploueziz ha kêriz gant arguzennoù toull gwall alies.

Ma'z eus un doare da envel an dud a vez graet gantañ gant lod evel ur gunujenn hag a hegaz ac'hanon ez eo an droienn "bourmaji"-ekolo ar c'hêrioù. A-raok kaozeal diwar he fenn, degasomp da soñj e talvez "bourmaji" kement ha "bourc'hiz-termaji". Lakaat a ra soñjal hon eus afer ouzh tud kalz a beadra ganto, pe en o aez da nebeutañ, hag a cheñch lec'h bevañ alies.

Bez' ez eus eus ar seurt tud moarvat, met pa weler priz an tiez e kêr, ez eo ret d'an nen bezañ ur mondan evit gallout dilojañ hervez e froudenn. Din-me ne dalvez ket kalz a dra an droienn-se. Peurliesañ e vez sellet ouzh ar bourmaji evel ouzh an ekolo eus ar c'hêrioù pe ar c'hontrol, n'on ket sur ken. E berr gomzoù, ne oar ket petra eo an natur wirion, ar pezh a dalvez bevañ war ar maez, ar pezh a dalvez bevañ en un endro rust.

## Ar ploueziad

Kontrol d'ar bourmaji-ekolo ar c'hêrioù e kaver "ar paotr eus ar vro", an hini a vev dezha-noz er fank hag a oar petra eo an natur wirion. Ar ploueziad eo evel ma lavarer er studiadennoù sokio-ekonomikel, ha c'hwezh vat a vez gantañ dindan e gazel. Soñjal a reer evel-just er



© Freepik

beizanted, er chaseourien, en dastumerien kebell-touseg, er besketaerien hag en holl baotred-se heuzoù en o zreid. Merc'hed zo ivez met chomomp hep en em goll e prederioù benelour betek re, n'eo ket ar poent.

## Bourmajied diwar ar maez ?

Bez' e vije eta, diouzh un tu ar re a gar an natur met na ouzont tra diwar he fenn hag a zo o chom e kêr ha diouzh an tu all, tud hag a oar da vat diouzh an natur met na glaskont ket pemp troad d'ar maout, a priori. Un tamm skort eo evel preder. Kement-se a dalvez disoñjal, da skouer, ez eus ur bern tud bet ganet war ar maez, hag a vag talvoudoù ha mennozhioù "ekolo" hag e teu re all da vevañ aze peogwir e kavont gwelloc'h en em zispakañ

en un endro yac'h pe yac'hoc'h.

An utopourien-se a zle bezañ ekolo un tamm bennak, ha ne vint ket feuket emichañs ma ran gant ar ger-se diwar o fenn. Hag ekologourien diwar ar maez a c'heller ober anezho ? Ha gwir o deus da vezañ en nomenkladur a vremañ ? Kement-se zo ivez chom hep gwelet ne chom ket kalz a beizanted hag en enep ez eus kalz a diekaerien<sup>2</sup> ha n'o devez ket kalz a zarempredoù ken gant an natur e logelloù o zractorioù. Brasaet eo bet o farkeier, skarzhet o c'hleuzioù hag o girzhier, eeunaet eo bet ar stêrioù a dreuze o zachenn, stouvet ar poullou, treuzfurmet ar pradeier hag al lanneier e tachennoù gounit. Pelec'h emañ an natur, pelec'h emañ ar spesadoù loened a veve en hor maezioù gwechall ?

Pelec'h emañ ar c'hluji ruz, ar breaned melen, an alc'hwedered hag ar re all ? Penaos e c'hallfe ul labourer-douar kustum deskiñ diwar an natur ha soñjal en deus an ali furoc'h evit a sell ouzh an endro eget ur bourmaji ekolo eus kêr ? Muioch a loened gouez zo sur-mat o vevañ e kêr eget er parkeier maiz...

## Mol zo da bep tra

Ploueziz<sup>3</sup> all zo, gwir eo. Ar re a wisk heuzoù evit mont da chaseal pe evit mont da besketa. Ar re gentañ zo mailhed war biologiezh hag ekologiezh ar spesadoù-jiboez. Kalz berroc'h o anaoudegezh war ar peurrest avat. An eil re a oar kalz a draoù diwar-benn ar stêrioù, met un dek vloaz zo bennak c'hoazh en em gaven gant lod hag a grede start e veze debret pesked gant an

avanked. N'eo ket ken eun se an traoù eta.

Gant-se, daoust ha mat eo enebañ bepred an dud diwar ar maez ouzh tud kêr, enebañ an ekoloed hunvreerien na ouijent seurt diwar-benn an natur hag an endro ouzh ar re a ouije pep tra, peogwir e vije kont evel-se, hag a-viskoazh eo bet evel-se ? Em labour en em gavan gant tud a oar ha tud na ouzont netra met kement-se n'en deus tra ebet da welet gant al lec'h m'emaint o chom pe gant ar vicher o deus...

<sup>1</sup>Bourmaji : bobo

<sup>2</sup>Tiekaer : exploitant agricole

<sup>3</sup>Ploueziz : les ruraux

LEPOHER

Ur pennad bet embannet e niverenn 1533 ar gazetenn Le Pôher. Troidigezh gant Ya!

## TRO AR VRO : UR VEAJ WAR VELO E SUIS gant Aorelian

## KM 432. LENN LUNGERN

• Hasli eo anv an draoñienn hag ar menezioù a zo tro-dro da Veiringen. Emañ e-mesk ar c'hornioù-bro poblet an nebeutañ e Suis. Se zo kaoz, kredapl, he deus savet an arme suis ur bon kirri-nij eno. Me zo tremenet hebiou dezhañ, ha me a lâz deoc'h, trouzus-bras e oa mont-hadont an nijerezioù abalamour da heklever ar menezioù.

• Bro Hasli zo stag meur a vojenn outi. Tud ar vro a grede dezho e oa skandinaviat o orin. Goude ma oa deuet kernez e broioù an hanternoz o dije ranket miliadoù a dud divroañ dre heg, goude bezañ bet tennet d'ar sort. Da-heul un hir a gerzhadeg e vijent en em gavet e Suis,

hag e traoñienn Hasli o dije divizet ober o annez. Abaoe ar Grennamzer e vefe eus ar vrud-se, a-gaoz d'ur meskaj etre Schweiz ha Schweden – Suis ha Sveden.

Gouez d'ur vojenn all e oa kalz korred en Hasli gwechall. Divizet o dije mont kuit, droug enno, goude bezañ bet touellet gant tud vras. Piv a oar, marteze e teuo en-dro ur c'horr, un deiz a vo, da desteniekaat an afer...

• N'emañ ket lenn Lungern en Hasli : emañ en un draoñienn all en tu all d'ar Brünigpass. N'eo ket gwall hir an hent-se met serzh-serzh eo. An trenioù a ya aes war grec'h dre un hent-houarn dre

zrezenn, an hini nemetañ e Suis. Ar varc'hhouarnerien, avat, a vez bec'h warno pa grapont war ar menez...

• A-us lenn Lungern on en em gavet gant un tourist deuet eus Arabia Saoudat. Din e oa ar wech kentañ gwelout un den eus ar vro-se. Dezhañ e oa ar wech kentañ gwelout un den o veajiñ war varc'h-houarn. Farsus e oa, rak skodeget-mik e oa ar paotr, ha nec'het zoken, seul vui p'en deus klevet e oa ganin war ma belo peadra da zebriñ ha da gousket. Follat mennozh evit neb ganet e bro ar petrol ! Sichant-tre e oa ivez, ha sikour en deus kinniget din, en aner, rak plaen e troe an traoù ganin.



© Aorelian